



## GUERZ

*Var sujet eun Den Yaouanq a voa deut da baea  
pêvar sqoët goude e varo.*

---

**S**peret-Santel, m'o ped, anflamit va speret,  
Da gana eur c'hantic evit ar Vretonet,  
Var sujet eun exemple trist pehini zo êruet  
Ebars en Breis-Izel, e mis Du tremenet.

Crena ra va c'halon ive va oll memprou,  
Va daoulagat ne reont nemet scüilla daelou,  
O tont da gonsideri peguer trist ê ar matier :  
Goulen a rân sicour eus ar Verc'hes santel.

Eun den yaouanc, sivoas, voa n'em abandonet,  
Goude ma voe maro e dud gant ar c'hlénved,  
A voa n'em abandonet da bep seurt tristidiguez,  
Da bep tristidiguez, da bep seurt paourentez.

Evel ma voa yaouanc, ne grede clasq netra :  
Tud vad, dre charite, a gass tamou dezâ ;  
Hac evel ma voa yaouanc e tevjot d'er scandalat  
Pa na gare sevel ha mont da labourat.

Souffr a ra mil injur gand güir baciantet,  
O laqat e fianç er verc'hes beniguet,  
Dre m'en devoa e imach hac hini ar Bassion,  
Ha ma rê diraze bemdez e orêson.



Un den eus ar c'hontre, un den eus ar c'hartier  
A deuas d'e velet, o clêvet e vizer,  
En eur larat deàn : deus d'am zi da labourat ;  
Ar c'hès a respontas : ne meus qet a zillad.

Gouzout a ràn certen labourat an douar ;  
Mes allas ! em'er paour, ne meus na pal na mar ;  
Pêvar scoët a vancfe din evit en em eqipa ;  
Me a yêlo d'ho ti sur evit ho paea.

An ozac'h var ar guer a ro pêvar scoët,  
O lavarar deàn : Va mignon, ne vanq qet,  
En eur lavaret deàn : deus d'am zi da labourat  
Pa po bet pal ha mar ha prenet da zillad.

Monet a ra d'e di, ma voe eur pennat mad ;  
Plijout a rê deze certen da labourat ;  
Un devez dreist ar re all e voe meurbet estonet  
O sonjal er paour-qèz pelec'h e voa chomet.  
Ma ejont ta da velet, hac e voe cavet maro  
Ebars en e lochic, var eun dornad colo.

Lienet voe ê gorf vit bea antêret ;  
Ar brud a zavas prest, ma teujot d'e velet.  
An den-màn' deuas ive evel m'oa eus ar c'hanton,  
A deuas d'e velet... O Doue pez eston !

Pa zorti eus an ti, d'an oll e lavare :  
Orato birvigen e ene ne antre  
En Barados un Doue, qen en devezo paeet  
Ar pez a rois deàn n'eus qet pell pêvar scoët.



Dre ar c'homzou terrupl pere a brononças,  
N'oun penos an douar d'e lònqa ne zigoras,  
Oc'h arrêti eun ene a voa e vont d'ar joayou,  
A vije recevet gant Jesus en eêvou.

Ar Verc'hes biniguet, dre ma voa dêi fidel,  
A accord eur mennad evit he zervicher,  
Ma teuje var an douar eun instant da labourat,  
Evit monet d'an ti da baea ar barbar.

Monet a ra d'e di, ha ma voe recevet  
Goulen a ra labour, ma voe deàn roet;  
Labourat a ra er parq qement hac an tri güella,  
Ar pez zo estonus, hep dêbri nac eva.

Pa zeu coulz ar repos, caer e vije'r pedi  
Evit monet gante assambles da zêbri,  
En em denne a goste, hac eno var e c'hinou  
En em string d'an daoulin evit souffre boaniou.

Dont a ra'n uzuiller, qemer a ra eston,  
Hac én monet ractal da laret d'ar Person  
En devoa eul labourer hac a rê qement a tri,  
Ar pez zo estonus, hep eva na dêbri.

Mâ, eme ar Person, cuntinuit bepret;  
Bremâ zouden vatant me yêlo d'e velet.  
Mes pa êruas er parq, dre bermission Doue,  
Ec'h anaveas pront penos voa eun ene.

Me cònjur, eme'r Person, lavar din me a ped  
Nê qet hirio eiz de em boa da entêret?  
Petra a zefot dide? Petra a glasques amâ!  
Petra a zefot did evit da zelvra?



Pêvar scoët am boa bet digant mestr an ti-mâ,  
On deut dre vouir voyen sur evit o faea :  
Oh! e leac'h pêvar scoet, eiz certen a vo roet,  
Eur veach, ene paour, qen a vi delivret.

Ne meus qet ar pouvoar da antre er joayou,  
Nemet gant va Æl-mat a clêfen ar c'hêlou  
Pedit Doue evidon, me a ya prest d'an êvou:  
Varc'hoas d'ar memes heur me rento ar c'hêlou.

Dont a ra ar Person da zigass an arc'hant,  
Ma vije delivret a boan hac a dourmant.  
Mesme, eme an ene, am boa int bet digantàn:  
P'oc'h eus ar vadelez, me o rento deàn.

Pa astennas e zorn da guemer an arc'hant,  
E santas an ardor, ar boan hac an tourmant;  
E vrec'h deo betec e scoa en instant a voe dêvet,  
An arc'hant eus e zorn d'an douar zo qüeet.  
Adieu, autrou Person, me yabremâ d'ar joayou,  
Me bedo evidoc'h Jesus-Christ, hon Autrou.

Pa dleoun den dêc'h, pa yêl eus ar bed-mâ,  
Elec'h dezirout drouc, pedit Doue gantâ:  
Pedomp bepret ha meulomp ma zayo da repos  
Ha da veuli Doue en gloar ar Barados.

FIN

